

KANNAOIG

Imbourc'h



Kelaouenn *Emglev An Tiegezhioù* niv. 82 Gouhere - Gwengolo 2013 Priz : 3€

Brezel Atav

E 1964 en devoa Yann Kerlann (Doue d'e bardono) kontet din ur sorbienn fentus bet c'hoarvezet gantañ deiz ar marc'had, e Montroulez, e gêr c'henidik mar ne fazian ket. A-raok an eil brezel-bed e oa. Peget e oa bet gant Paotred "Breiz Atao", un toullad skritelloù war mogerioù ar gêr ma weled splann warno, e lizherennoù bras, ar gerioù "Breiz Atao". Kejañ a reas war ar marc'had gant ur c'houer a anaveze. Chalet e oa ar c'houer gant ar gerioù-se "Breiz Atao", ken e c'houlennas ouzh Kerlann perak e felle d'an "otonomisted" ober "brezel atao". E zisouezhet en devoa diouzhtu : ne oa ket anv eus brezel aze evel-just, ha Kerlann da zisplegañ din ne oa ket komprenet gant kalz brezhonegerion a-vihanik ar ger "Breizh" pa oa distaget e-unan-penn, hep ar ger "izel" staget outañ. Evito ar ger reizh evit treiñ ar ger gallek "Bretagne" a oa Breizh-Izel. Setu perak e vignon kouer en devoa soñjet e talvez e ger-se, "breiz", kement ha "brezel".

E sorbienn Kerlann em eus soñjet a-greiz-holl pa glevis darvoudoù Siria o tont bemdez war dabiez ar meziennoù, ha kement a dud a fell dezho mont da blantañ ar brezel du-hont evit kastizañ bourev e bobl a vefe, sañset, an diktatour Bachar el-Assad, rak, gazadur karter Ghouta e Damask ne c'hell bezañ bet graet, evit ar meziennoù bras-se, nemet gant an den fallakr-mañ.

Den ne gemer ur predig amzer evit prederiañ un tammig, rak petore splet en dije bet El-Assad da

gazañ tud Ghouta ? Hini ebet ! Gouzout a ra ez eus bet savelet ul "linenn ruz" gant an Amerikaned, da chom hep he distremen, hag al linenn ruz-se a zo dres arver ar stourmaezhennoù¹. En-enep, evit an darsavidi² ez eo spletus ar gazadur-se peogwir e c'hell distignañ emell ar C'hornogiz, pezh a c'hortozont abaoe pell amzer.

Ankounac'haet o deus ar C'hornogiz, hag izili ar gouarnamant gall da gentañ-penn, gevier an Amerikaned evit reizhabegañ bewech o emelladennoù : gobidell ar gorerezioù-babigoù e

Koweit evit brezel ar Plegmor, gobidell an armoù-distruj a yoc'h evit brezel an Irak, ma oa Mavdiern Bro-C'hall, Galouzeau de Villepin a-enep-krenn, hag a c'houezas trugarekadennoù an Arabiz pa zisplegas taer e brezegenn e tribun an ABU e New

York. Un emell hervez ar broioù hag hervez an degouezh ez eo bet koulskoude hini ar gouarnamantoù gall, hag an hini diwezhañ, er Mali, daoust ha n'eo ket bet an hini souezhusañ, keñveriet gant gant un emell e Siria : stourm a-enep islamourion er Mali, bet armet dreist-holl gant armoù atoret e Libia bet taget gant Gallaoued, Amerikaned ha Saozon - ha perzidigezh argelek Katar gant pemp karr-nij *Mirage 2000* evit reiñ ul livadur arabat ha muslimat d'un emell kornogat -, en anv an

¹ Stourmaezhennoù : *gaz de combat*.

² Darsavidi : *rebelles, insurgés*.

Demokratiezh santel, hogen, en-enep, skoazellañ hevelep islamourion e Siria, maz eo un darn anezho estren da Siria, deuet da ober ur brezel a relijion en ur argas ar Gristenion diouzh ar vro.

Ne vez ket meneget kalz eus an dra-se er meziennou bras, hogen war ar genroued ne vank ket al lec'hiennou evit ho kelaouiñ. Kristenion lazhet, beleion ha eskibion skrapet, Kristenezed yaouank skrapet evit ober dezho dimeziñ gant Muslimiz : setu tonkad pemdeziek Kristenion Siria.

D'an 8 a viz Gwengolo 2013 e tiserie tiern ar Rouinellerezh³ amerikad : "Mar tinac'h ar C'hornogiz skeiñ e Siria e vo se Munich hor remziad". D'an 9 a viz Gwengolo ez eilgerie dezhañ Renaud Girard en ur pennad eus ar Figaro : "Ar gwir Vunich ez eo dilezel Kristenion ar Reter". Aloubidigezh kêr Maaloula, e Norzh da Zamask, a anver al "Lourdez siriat" gant an talbenn islamour *Al-Nosra* e derou miz Gwengolo n'eo ket bet evit dinac'h komzoù R. Girard. Kerkent ha bezañ bet mistri war ar gêr e krogas an djihadourion da zistrujañ kement arouez kristen er gêr, ha da zrastañ kroazioù, delwennoù, ilizoù ha manatioù, hag embann e vefe lazhet kement hini na ganttrofe ket d'an Islam. Kristenion 'zo o deus kemeret an tec'h, hogen Kristenion all a zo bet lazhet, sur, lod dibennet. Pegement ? Diaes eo lavarout kent ne vo ket dieubet ar gêr gant an arme siriat ha deuet ar peoc'h en-dro ; d'ar 14 a viz Gwengolo ne oa ket dieubet c'hoazh ar gêr penn-da-benn, met e voe en deizioù war-lerc'h. Ur skouer vat eo Maaloula eus pezh a c'hortozfe ar Gristenion du-hont, mar c'hoarvezfe d'an Islamourion bezañ trec'h e Siria. Dorioù enkerzh kêr Maaloula, a weler war al luc'hskeudenn (pajenn 1) n'eus mui anezho, distrujet int bet gant danvez-tarzh gant darsavidi *Al-Nosra*.

D'an 13 a viz Gwengolo en deus diskleriet Vladimir Putin, siwazh d'ar meziennou bras, e oa an darsavidi kiriek eus gazadur Ghouta. N'eo ket an hini kentañ o tiogeliñ an dra-se : war al lec'hienn RTL-TVI e kaver testeni un istorour belgat, Pierre Piccinin, bet dalc'het prizoniad e-pad 5 miz e Siria a-gevret gant ur c'helaouenner italian, Dominico Quirico, da gentañ gant an Arme Siriat Dieub e-pad 2 viz, ha da c'houde gant meur a strollad feuls-tre, enep-kornogat, islamour hag enep-kristen touet. Daoust dezhañ bezañ atav a-du gant an darsavidi e tiogel gellout

prouiñ ez eo an darsavidi siriat kiriek eus tagadenn gimiek an 21 a viz Eost e Ghouta. Ouzhpenn-se e tiskler emañ an Arme Siriat Dieub o tizeriañ mui-ouzh-mui, hag ar strolladoù islamour o kreñvaat.

Bez' e c'heller lenn war lec'hienn ar "*Salon Beige*" kement-mañ c'hoazh : "Hervez kelaouenner an *Associated Press*, meur a vezeg o chom e Ghouta, darsavidi hag o ziegezhioù, a ziozel ez eo bet degemeret gant lod darsavidi armoù kimiek dre hanterouriezh Tiern ar stlennerezh saoudat, ar Priñs Bandar bin Sultan, hag ez eo an armoù-se a zo bet kiriek eus tagadenn gimiek marvus an 21 Eost. An darsavidi ne vijent ket bet stummet reizh war an doare da embreger an armoù kimiek-se ha ne ouient ket eus petra e oa kont. [...] Ur stourmer eus an enebiezh en dije lavaret e vije bet embreget an armoù-se en un doare ne oa ket mat, pezh en dije distignet an tarzhadennoù.

D'ar 6 a viz Gwengolo en deus *Russia Today* embannet un dazaters gant Mamm Agnès-Mariam karmeladez, saverez ha superioez manati St Jakez ar Mac'hagnet. Eviti ez eo gobidell Ghouta ur c'hoveliadenn : niver ar 1729 gwazhiad⁴ gazet, roet gant an Arme siriat dieub, a vefe da rannañ dre dri. Leurennet⁵ e vije bet an taol ha prientet en a-raok gant ar pal da lakaat ar gouarnamant siriat evel kiriek. He frouenn bennañ a zo ar gwazva *Reuters* a embannas e gemalennoù⁶ filmet da 6 eur 05 diouzh ar beure pa oa bet graet an dagadenn kimiek etre 3 eur ha 5 eur. Goulenn a ra Mamm Agnès-Mariam penaos ez eus tu da zastum un dek bennak a gemalennoù disheñvel, da gaout muioc'h eget 200 bugel ha 300 den yaouank tolpet en ul lec'h hepken, da reiñ dezho ar skoazelloù kentañ ha da filmañ dazatersoù ganto, ha kement-mañ e nebeutoc'h eget teir eurvezh ? Goulenn a ra c'hoazh perak ne weler korf plac'h ebet e-touez an holl vugale-se a lavarer ez int marv ? <http://www.christianophobie.fr/breves/mere-agnes-mariam-une-sequence-sur-le-gazage-de-ghouta-est-une-mise-en-scene?utm>

Daoust da gement-se, evit F. Hollande, Obama hag o c'henseurted, n'eus nemet Bachar el Assad a c'hell bezañ kiriek - peogwir ez eo un diktatour -, daoust ma ouzer e vez djihadourion o neradiñ er vro, skorennet⁷ brokus gant Katar

³ Rouinellerezh : *diplomatie*.

⁴ Gwazhiad : *victime*.

⁵ Leurennet : *mis en scène*.

⁶ Kemalenn : *séquence*.

⁷ Skorennet : *subventionné*.

hag Arabia Saoudat hag oc'h en em ren er vro en un doare dizenel. Lakaat a reont war ar genroued filmoù eus o c'hurioù tristedik : andishadurioù⁸ prim war-lerc'h un drevezadenn a brosez, pe c'hoazh, evel ma 'm eus gwelet, hiniennoù dic'houzouget gant ur c'hontel-kegin.

Hogen tud all en em c'houlenn ha ne vije ket bet dleet brezel Siria d'ur raklun aezhennsan⁹ etre Doha hag Europa ? Setu an dezenn a zifenn Naoufel Brahim El Mili, kelenner e *Sciences Po Paris*, en e levr [Le printemps arabe : une manipulation ?](#) (An nevez-amzer arabek : un tunembregadur ?) Editions Max Milo. Diskouez a ra hollc'halloudegezh Katar pinvidik-mor ha levezon dreist e chadenn skinwel dre loarell *Al-*

⁸ Andishadur : *exécution*.

⁹ Aezhennsan : *gazoduc*.

Jazeera war ar bed arabiat a-bezh. Ezhomm en deus Katar ober tremen e aezhennsan a-dreuz Siria evit pourchas e aezhenn da Europa ar C'hornog. Bachar el Assad a voe a-du da gentañ-penn, hogen aon en deus bet e vefe feuket Rusia, e warezer pennañ, neuze en deus nac'het kinnig Doha. Adalek neuze, e teuas ar renad siriat da vezañ an enebour da ziskar, ha Kornogeuropa da harpañ Doha, rak c'hoantaat a ra digreskiñ he diazalc'h gremmel¹⁰ gant Rusia. Luziet, rouestlet, eo ar Reter Nesañ war pezh a lavarar, un digarez mat e teu da vezañ en diwezh al luziadell-se evit tud 'zo na fell dezho e vefe diguzhet o iriennoù.

Donwal Gwenvez 17/9/2013

¹⁰ Gremmel : *énergétique*.

Ene Bro-C'hall eo an Ingalded

E raklavar d'e 60 kinnig brudet - en o zouez evel-just an dimeziñ etre pared heñvel o rev -, e tisplege an danvez-prezidant gall François Hollande, ez eo an "Ingalded ene Bro-C'hall". Evel un toullad politikerion ez eo gouest, a-dra-sur, da fustañ gevier eus an dibab, hogen, evit an degouezh, e kredan edo ar gwir gantañ. Mac'hvredet¹¹ eo ar C'hallaoued gant ar ger-se "Ingalded" abaoe pell amzer, adalek an Dispac'h gall a-dra-sur, dre maz eo bet kemeret da c'her-stur gant ar Republik c'hall, a-gevret gant ar gerioù "librentez" ha "breudeuriezh". Daoust ma vez haeret gant tud 'zo ez eo an drielezh-se vertuzioù kristen dihentet, ne c'heller ket nac'h ez int argeloù mennet gant ar frankvasonerezh, hag a vez gwellet skrivet e lizherennoù bras en temploù masonek gall, evel evit merkañ ez eo bet ar frankvasonerezh marc'h-ambilh an Dispac'h gall, hag ez eo ar Republik gall o oberenn, o ferc'henntiezh.

A-dra-sur ez eo tost an drielezh-se da galon ar mavdiern Vincent Peillon pa lavar deomp e fell dezhañ adeiladiñ warni e relijion republikan, hogen faos e son kevelstrollad¹² an tri ger-mañ, pa lavar ne c'hell ket Bro-C'hall bezañ ur vro a librentez gant ar relijion gatolik. Amañ e welomp kerkent an digembezusted a zo etre "librentez" hag "ingalded" : an Aotroù Peillon a soñj dezhañ marteze e vefe ingal etrezo an holl

¹¹ Mac'hvredet : *obsédé, obnubilé*.

¹² Kevelstrollad : *association*.

geodedidi gant e relijion republikan evit an holl evel ur yezh hepken, ar galleg, gant an holl C'hwec'hkogniz, hogen evit pezh a sell ouzh al librentez e vefe aet Yann pell diouzh e gazeg, rak ne vefe ket dieub da ober diouzh pezh a c'hourc'hemenn dezhañ e goustiañs hag e feiz.

Aleksander Soljenitsin – Doue d'e bardono – bet pedet gant Philippe de Villiers da geñver un digorlid bennak er Puy du Fou er Vendée, un nebeut bloavezh a-raok e varv, en devoa diazezet e brezegenn war an digembezusted-se a zo etre "librentez" hag "ingalded" kemeret da c'herioù-stur gant ar Republik C'hall. Ne oa ket faos e haeradenn. Ar ger "librentez" kemeret da c'her-stur a empleg, en e ster rik, ne c'heller ket lakaat un harz da c'hoantoù an dud. Hogen pa vez haeret e tle an dud bezañ ingal etrezo, e welomp diouzhtu ez eus un dislavar gant al "librentez", rak ganti e ren an dizingalded dre natur. Soñj em eus c'hoazh eus pezh a lavare va zad : "Mar c'hoarvezfe un deiz e vefe rannet holl binvidigezhioù ar bed en un doare ingal etre an holl dud a vev war an douar-mañ, a-benn un devezh e vefe deuet lod anezho paour-razh keit ha ma vefe deuet lod all pinvidik-mor, rak lod a yafe kerkent da zispign o arc'hant er c'hafedioù pe da c'hoari en ur c'hazino bennak, e-keit ha ma vefe lod all o tastum an arc'hant-se dispignet brokus gant ar re gentañ.

Ar pep boutinañ er bed-mañ ez eo an dizingalded. Hep komz eus an arc'hant hag eus

ar madoù danvezel, e ren splann an dizingalded etre an dud. Kaer eo lod, ha lod all divalav, bras eo tud 'zo tra maz eo bihan tud all ; moal e teu da vezañ an hanter eus ar wazed a-raok tapout hanter kant vloaz, hag e vir an hanterenn all he c'hrewichenn betek deiz ar marv. Tud 'zo a gav mat evito kemer o amzer, kemer plijadur, landreantiñ zoken, e-pad ma vez tud all oberiant-kenañ, a gav e vefe amzer gollet soñjal er plijadurezhioù-se a zo rivin an ene evito.

Tud 'zo a lavaro deoc'h ez eo an ingalded-se da vezañ gwelet hepken er ster republikan, da lavarout eo ingalded a wirioù etre an dud, pinvidik pe baour e vefent, ingal e vezont dirak al lezenn. Ya ! hogen evit an darn vrasañ eus an dud ez eo se gerioù hepken, soñjal a reont en ingalded en un doare fetisoc'h, pleustrekoc'h, danvezeloc'h, hag aze e kejomp marteze gant komzoù Victor Hugo pa lavare gant "*Choses Vues*" : "*Ingalded, troidigezh eus ar ger 'c'hoant' er yezh bolitikel*".

Unan eus gwanderioù pe techoù an demokratiezh e keñver ar renadoù groñsrenek ez eo ar retvez da c'houzout goveliañ higennoù bouetet mat evit mont da besketa an dilennerion hag aze netra gwelloc'h eget c'hoantoù ha zoken gwallc'hoantoù an dud diskouezet evel palioù da dizhout evit ma renfe an ingalded etre an dud. Evel-se eo bet gwelet "*dimez*" an heñvelrevidi. Gwarizi tud na fell ket dezho bevañ evel ar re all, hogen a c'houlenn e vefe roet dezho an hevelep digoroù ha lidoù. Paz eo bet mouezhiet lezenn Taubira er Vodadeg Vroadel C'hall ez eo bet skandet "*ingalded*", "*ingalded*", gant kannaded an tu kleiz, en ur ober strakal goulc'herioù o fupitroù, evel pa vije bet skolidi o ren an draw¹³ e dibenn ar bloavezh-skol, pezh a ziskouez siriusted al lezenn-se. Gobidell ar "gender" a fell da V. Peillon e vefe studiet er skolioù, met a oa ivez a-du gantañ mavdiern Sarkozy, Jean-Luc Chatel, a evod ivez diouzh ar c'hoant arloup-se d'an ingalded, hogen ar wech-mañ e vez taget ar Grouadelezh evel m'eo bet mennet gant an Aotrou Doue : "*Hag e krouas Doue an den, diwar e skeudenn e krouas anezhañ : gwaz ha maouez e krouas anezho*" (Geneliezh 1 - 27). Evit lod benevelourezed ez eus aze un dizingalded dic'houzañvadus a zle

¹³ Draw : *ger eus brezhoneg gwenrannek, kengwriazienn gant « drev », o talvezout : fest, cholori, diduamant, chomet er mitaweg gant un toullad gerioù all deveret : « dërweñ » (un tammig foll, stultennus), « dërwinê (laouenan), « dërwin » (rebed-rod).*

bezañ reizhet hep gortoz gant lezennoù nevez. "*Evel Doueed e vezot en devoa lavaret ar naer kozh da Adam hag Eva...*

Ur soutil a fablenn en deus skrivet Yann ar Feunteun a zivout ar c'hoant, ar warizi : "*Ar pahun o klemm ouzh an doueez Yunon*". Unan eus ar bravañ laboused eo ar pahun gant pluñv e lost livet kaer hag a ya da ober ur gwir ganevedenn pa vezont displeget gantañ, hogen, pell eo kan ar pahun da vezañ ken kaer hag e bluñv. Mont a reas da glemm ouzh an doueez Yunon eus an dizingalded-se, paz eo bet roet ur c'han ken brav, ken heson, d'an eostig a zo a-hend-all ur c'hrouadur dister e-keñver meurbed ar pahun. "*Labous gwarizius !*" a laosk dezhañ Yunon. "*Pep aneval n'en deus ket an holl perzhioù mat. Roet hon eus perzhioù lies dezho : da zarn ar meurbed hag an nerzh, da zarn all ar skañved ha dilikatez o c'han, hogen laouen eo an holl gant o delodadurioù*¹⁴. Paouez enta da glemm, pe evit da gastizañ e lammin dit da bluñv".

Meur a dorfed a zo bet sevenet gant ar Republik C'hall hag a ziskouez splann an dislavar etre an daou c'her-se : "*librentez*" hag "*ingalded*", hag an hini kentañ a zo bet marteze ar galleg, gourzodet¹⁵, sañset, en anv an ingalded, d'an holl C'hwec'hkogniz, hep damantiñ d'o librentez peogwir ne oant ket gall a orin. Hogen en ur zegemer hiziv war he diriad atav muioc'h-mui a enbroidi arallouenn e vo liesaet c'hoazh an abegoù da enebañ ingalded ha librentez, pezh a weler bemdez gant kudenn ar ouel vuslimat, ar merc'hed muslimat a c'houlenn eurioù dezho evit mont d'ar gouronkkell, ar pedennoù muslimat er straedoù hag el labouradegoù, ar boued "halal" er predtioù-skol, ha kalz traoù all en deskadurezh c'hall ha n'eo ket kembeus gant an Islam *stricto-sensus*. Kement se a vez komprenet mat gant ar bras eus an dud, hag a zlefe bezañ komprenet ivez gant ar bolitikerion, hogen ar re-se a gav gwelloc'h lakaat ur ouel - "*islamek ?*" -, dirak o daoulagad, evel ma vefent lemminged¹⁶ o vont d'en em veuziñ er mor a-vil-vern.

Yann MIKAEL

¹⁴ Delodadurioù : *attributions*.

¹⁵ Gourzodet : *imposé*.

¹⁶ Lemming : *doare logodenn-vors eus Skandinavia a ya d'en em veuziñ a-vil-vern er mor a vare da vare paz int deuet da vezañ re niverus*.

Gwir-respont ul lenner eus Bremañ

D'an Nevez-amzer he doa embannet ar gazetenn BREMAÑ daou bennad hag ul ludresadenn a save a-du gant lezenn da zimeziñ an dud heñvel o reizh, pezh a sav a-enep-krenn ouzh al lezenn naturel. E gwirionez, war galz a grafoù er mare-mañ muioc'h eget biskoazh e weler ar gouarnamant gall, gouleviet evel boaz gant ar frankvasonerezh, o pellaat diouzh al lezenn naturel. Setu amañ respont hir Tomaz Jacquet da VREMAÑ.

Ur pennad mat zo e lennan ho kelaouenn pa 'z on koumanantet abaoe meur a vloaz... dre-vras e kavan plijus a-walc'h, met aze on bet dipitet naet gant an daou bennad diwar-benn an eured evit an holl en niverenn 380 !

Karout a rafen resisaat un nebeud traoù :

- Meur a Vreizhad o deus manifestet a-enep an eured evit an Holl : dre chañs n'o deus ket an holl Vrezhoned an hevelep soñj war gement a c'hoarvez er bed...

- Daou geal a seblant bezañ droukvesket ganeoc'h : bezañ a-enep an Eured evit an Holl n'eo tamm ebet bezañ heñvelrevgasaour.

- N'omp-ni (me, ma familh ha meur a vignon din, kalzik a vrezhonegerien en o zouesk) na "faskourien", na tud "feuls (eus) an tu dehou pellañ"... ha pa vefemp bet, bep tro, o vanifestiñ e Pariz war galv ar Vanif evit an Holl. Aze e rankan lavar deoc'h on en em santet kunujennet gant ho pennadoù.

- dismegañs a zo, e gwirionez, er pennadoù-se, met d'am soñj ar skriverien anezho n'o deus ket komprenet ervat pegen arvarus eo al lezenn-se ha, dreist-holl, petra a zo a-dreñv... Setu ma klaskin displegañ pere eo an abegoù o deus hol lakaet da sevel a-enep da lezenn Taubira :

- Hep bezañ heñvelrevgasaour e mod ebet, an heñvelrevelezh, n'eo ket da vezañ sellet outañ evel ouzh un dra voutin : an dud heñvelrev a embann bezañ disheñvel diouzh ar muianiver, darn a lavar zoken, gouzañv diwar o stad... N'en deus ket eta ar gouarnamant da sevel ur framm lezennel hag ofisiel evito : an darn vrasañ eus ar c'houbladoù heñvelrev n'emaint ket e soñj da zimeziñ, n'eus forzh penaos, un darn anezho zoken a zo savet a-enep da lezenn Taubira hag a zo bet gwelet o tibunañ gant ar Vanif evit an Holl !

- Pal an eured n'eo ket hepken bevañ a-gevret hag en em garout. Pal gwirion an eured eo krouiñ ur familh. Diwallomp da lakaat ar gerioù da goll o ster... dreist-holl a-berzh renerien ar vro. Lakaat ar gerioù da goll o ster eo kemm ar wirionez, en un doare ; klask e zisneuziañ da nebeutañ.

- Arabat eo da vab-den soñjal e c'hall mestroniañ pep tra : lakaat, da skouer, daou zen heñvel o rev da gaout bugale : ar vugale a zo frouezh karantez ur gwaz hag ur vaouez. Nag an dornatadurioù teknikel nag ar savadurioù gwirel ne c'hallont kuzhat ar gwirvoud diazez-mañ.

- Pal lezenn Taubira a zo aotren an eured hag an advugelañ evit an heñvelrevidi. Hogen n'eo ket an titl-se zo bet lakaet dezhi gant hor politikourien, kuit da feukañ re a dud memestra ! Ha koulskoude emañ an advugelañ e-barzh al lezenn e gwirionez... Rak neb a lavar "eured" a lavar ivez "maberezh"¹⁷ Hag amañ emañ ar gwiridig !

- Ma c'hall ar c'houbladoù heñvelrev dimeziñ, Europa, war zigarez kevatalded etre an dud dimezet, a redio Bro-C'hall da aotren dezho ar C'hanadurezh Skoazellet gant ar Vezegiezh (PMA e galleg) hag an Dougerez Evit Unan all (GPA¹⁸ e galleg). Da-c'houde, war zigarez ingalded etre an holl dud, Bro-C'hall a ranko aotren kement hini a fell dezhañ (hag en deus arc'hant bras, arabat disoñjal...) d'ober gant ar GPA evit kaout bugale... Ha setu ni, dres evel er Stadoù Unanet ma vez graet arc'hant bras gant lod diwar seurt trafik dizenel.

- Deomp pelloc'h un tamm : diwar betra ez a ar gouarnamant da gemm pep tra war dachenn gwir ar familhoù, hag evit petra ?

Ar re-se zo bet gounezet, tamm-ha-tamm, da gealiadur ar gender : un deorienn diorroet er Stadoù Unanet, ken abred hag ar bloavezhioù 50, gant ur venevelourez radikal a felle dezhi "digabestrañ ar maouezed diouzh beli ar baotred." Ken pell int aet gant o mennad, bremañ ma ne fell ket ken d'ar benevelourezed radikal-se (gounezet da gealiadur ar gender) kaout bugale en un doare naturel. Diouzh o soñj e rankfe ar vugale bezañ ganet en ur mod all

¹⁷ Maberezh = filiation

¹⁸ "Mammoù o tougen" mar kavit gwell (komzet e vez eus se dija er Senad er mare-mañ)

(gant maouezed reuzeudik eus ar broioù paour, emichañs...) Setu ma sav bremañ enebiezh etre ar benevelourezed radikal-se hag ar benevelourezed etre (a stourm evit dellezegezh ar maouezed).

Ober a ra berzh kealiadur ar gender e metoù ar bolitikourien peogwir e teu, da-gentañ, eus ar frankvasoned, a zo stank e-mesk ar bolitikourien, ha kreñv o levezon er mediaoù gall ivez... Ha petra eo pal ar frankvasoned a-benn ar fin ? Mestroniañ ar bed a-bezh, kabestrañ an holl dud vihan evelomp-ni... a-benn ober diouzhimp sklaved ! Hag evit-se e rankont da-gentañ peurzistruj ar relijionoù ha diwriziennañ ar pobloù¹⁹.

Ha setu kavet ganto un doare efedus da dizhout o fal buan-tre : distruj ar Familh, a zo anezhi kell diazez hor c'hevredigezh. Adreizhadur ar skolioù kinniget gant Peillon, a sko war an hevelep tu, pa fell dezhañ lemel ar vugale digant o zud hag ar relijion²⁰, peogwir e soñj dezhañ n'eo ket peurechu an Dispac'h gall²¹ !

¹⁹ *soñj ho peus eus an doare heugus ma oa bet taget ar skrivagner Roparz Hemon er bloavezhioù 2000 : frankvasoned a oa a-dreñv.*

²⁰ « *soustraire les enfants au déterminisme de la famille et de la religion* »

²¹ V. Peillon "La Révolution française n'est pas terminée" (embannadurioù ar Seuil, 2008) ; da adlenn ivez « *Emgann Kergidu* » gant Lann Inizan !

- Met ar pezh en deus va lakaet ar muiañ da enebañ ouzh lezenn Taubira, a-benn ar fin, ez eo an dismegañs, ar fae graet war milionoù a dud o tibunañ e straedoù Pariz d'an 13 a viz Genver, d'ar 24 a viz Meurzh ha d'ar 26 a viz Mae... CRSed armet hag harnezet o tagañ tud dinoaz... harzidigezhioù dreistreizh diniver e-touesk ar Veilherien... Ar gevier livet er mediaoù goude-se... Ar sifroù digresket a 80%, embannet dichek gant Maodiern an diabarzh d'an deiz goude, al luc'hskeudenoù falset... Holl int doareoù ur renad hollveliour ! Hep disoñjal kennebeut an doare dizemokratel a-grenn ma oa bet lakaet lezenn Taubira da dalvezout (tremenet dre heg kentoc'h eget dre gaer, ken er Vodadeg Vroadel, ken er Sened).

Evit klozañ : aes eo tufañ war an dud, en ur lavarout ez int eus an tu dehou pellañ (eleze nann "*politically correct*"...) mat vefe da unan ivez skubañ dirak e zor a-wechoù ! Ma vijec'h bet er Vanifestadeg evit an Holl e Roazhon d'ar 5 a viz Mae, gwelet ho pije neuze gant piv e oa feulster : gant an 20 000 a dud o tibunañ a-enep da lezenn Taubira pe gant ar 150 den bennak a-du gant an eured evit an holl (tud tost da LGBT an holl anezho) ? Aze e oamp bet kunujennet, skoet, taolet mein warnomp... Gant ar vezh ! (morse, koulskoude ne vez graet meneg gant ar mediaoù eus feulster tud an tu kleiz pellañ..)

Tomaz Jacquet

Diouganoù an Diaoul

N'eo ket ar mennozhioù eo o deus graet diouer din e kerzh ma buhez : an amzer evit displegañ an holl anezho pizh-pizh dre skrid, evel ma vefe mat ober, ne lavaran ket. Setu e strewan anezho amañ hag ahont, en dizurzh, e pennadoù, prezegenoù, kentelioù. Ganin ur spi mui-pe-vui e teuio war ma lerc'h unan bennak dezhañ pasianted a-walc'h evit dastum an tammoù ha sevel kendodoù²² aesoc'h da ziazezañ gant ar braz eus al lennerion.

Galloud an arouezioù istorel drezo o-unan a zo unan eus ar mennozhioù-se n'am eus ket bet amzer da ziorren ervat. Sed aze an afer berr-ha-berr : oberoù ha dibaboù dieub a ya d'ober an istor ; a-wechoù avat e c'hall an dud em lezel da vezañ heñchet gant mennozhioù hag arouezioù

n'int ket evit peurgompren evit ar poent, hag ar ster diweladus kuzhet en arouezioù pe mennozhioù-se a dro da hewel a-greiz-holl, e pezh a anver "gwallzarvoudoù an istor".

Ha pell-pell zoken goude ma-z eo c'hoarvezet an darvoudoù ne vez ket gwelet ez-anat c'hoazh ar ster kuzhet en arouezioù-se. Boazamant an arnevezidi da veizañ an traoù a-hanter, da welout an traoù war un tu nemetken diouzh ar raktresoù istorel, a zo kaoz d'an dallentez-se.

En istor sakr, ne c'hoarvez ket an traoù e-giz-se : pep tra a vez rakdiskuliet fraezh. An Testamant Kozh a rakwel sklaer tonkadur hejet-dihejet ar Yuzevion, hag an hini nevez a rakwel emzistruj a-hiziv an Iliz, a souezh hag a spont kement a feizidi en hor grez.

²² Kendod : *synthèse*.

En istor ansakr avat, an arouezioù a vez kuzhet kalz tuioù anezho gant yoc'hadoù dallentez ha strizhded-spered. Setu e c'haller keñveriañ anadigezh a-nebeudigoù an tuioù displijus-se e-kerzh an istor ouzh emdroadur un neuroz diazezet war ur gwalleur a vugaleaj bet ankounac'haet e-pad pell.

Hegel a rae anv er par-se eus “Troioù-gwidre ar Poell”, a heñche an dud hep gouzout dezho ; ker reizh all e vefe ober anv eus “troioù-gwidre an diemskiant”, ma vez arouezioù goanagus-tre o heñchañ an dud davet euzhusterioù ha poanioù.

Ur skouerenn eus kement-se eo ar raktres sokialour, sañset “sokialekaat ar binvijikenderc'hañ”, en anv ur “gevredigezh hep renkadoù”. War-dreñv an diskanoù-se ez eus unanidigezh ar galloud politikel gant ar galloud armerzhel, hag an unanidigezh-se a gas da get unan eus mammennoù pennañ ar frankiz er bed kevalaour, hag a sikour gant krouiñ ur renkad-meur dizistrujadus renerion hollc'halloudek.

An diougan war-dreñv ar c'homzoù kaer a c'haller gwelout neket hepken er mennozhioù hirzipleget hag er c'hinnigoù politikel, met ivez en arouezioù poblek a ziverr ar mennozhioù-se. Ar C'han Etrevroadel Komunour, bet savet e 1871 gant Eugène Pottier ha lakaet sonerezh warnañ gant Pierre de Geyter e 1888, ar c'hansse a deog c'hoazh kement a stourmerion hiziv, a oa dija en e bozioù kentañ diougan an holl gwalleurioù a yae d'ober istor ar gomunouriezh. Zoken war-lerc'h kouezh an URSS, ken fall komprenet e vez c'hoazh an diougan-se, ken e klask ur bern tud seveniñ an diougan-se en-dro gant doareoù nevez, souezhusoc'h c'hoazh eget kent, gant muioc'h c'hoazh a ijin eget kent ; fellout a ra d'an dud-se em douellañ o-unan muioc'h c'hoazh eget ar re o deus degaset ar c'hroñsrenad soviedel.

Er ganenn-se, e vez galvet “tud daonet an douar”(les damnés de la terre) ha “galeourion an naon”(les forçats de la faim) gant ar Poell, ar *Raison*, doueez 1789. Eus pelec'h e teu mouezh an doueez-se avat ? “Ar Poell a groz er menez-tan” (*La raison tonne en son cratère*) : eus donder un toull-gurun e teu ar vouezh-se, ha neket eus an neñv. Sklaer amañ n'eo ket un uhelvennad meur en neñv o heñchañ an dud, met un nerzh a-zindan douar, eus an ifern.

Poell ez eus en nerzh-se sur, poell an diaoul eo avat, ar poell-se a souezh ar barzh Dante en e

Inferno : “N'az pije ket kredet ez eus poell ennon ivez, neketa”, eme Satanaz da z-Dante er barzhoneg-se. Gwir, al lezenn kuzh ha didec'hadus war-dreñv an angerzh-se a lak dalc'hmat oberoù an engroezioù da vont war-zu darvoudoù dirakwelet ha spouronus ; orin teñval ar promesa-se, forzh pegen fall e vefe anavezet pe komprenet, ne baouez ket evit keloù-se a heuliañ e lezenn piaouel.

Zoken er rummad komunourion a oa bet dic'hoanaget a-grenn (betek emlazhañ zoken evit lod anezho) gant diskuliadur an torfedoù-bras soviedel e 1956, hini ebet ne dennas gounid eus ar gentel evit kompren gwelloc'h ar poell a ren an uhelvennad sokialour. An holl anezho a glaskas displegañ ar walenn evel frouezh diwar wallzarvoud ur strollad treitourajoù pe fazioù, hep gwelout e tislavarent evel-se o feiz e kerzh diharzadus an Istor hag an araokaat, e kont ennañ nebeut pe netra an degouezh pe an ardoù hiniennel.

Helavaroc'h c'hoazh ar poz war-lerc'h : “Tarzh diwezh ar menez-tan” (*C'est l'éruption de la fin*). An diwezh a zeu eus kof ur menez-tan neuze. Diwezh petra avat ? Ar ganenn ne lavar ket. Ar selaouerion, boas da sellout ouzh un tu d'an traoù nemetken, a soñj diouzhtu ez eus anv aze eus diwezh an direizhder ha netra all. Padal, ar ger “an diwezh” (*la fin*), hep renadenn ebet, ne gemenn nemet marv ha distrujerezh.

Hag ar pozioù goude ar re-se a zo skrijusoc'h c'hoazh o dasson en hon amzer : “Diouzh an daol raskomp an tremened” (*Du passé faisons table rase*) : diverkañ an amzer-dremenet, falsañ an istor en anv ur galv plijus ha diredis bennak, sed aze a-dra-sur unan eus obererezhioù muiañ-karet an istorerezh kleizat ofisiel, peadra d'an engroezioù da dec'hout kuit davet an dazont, hervez ur raktres a zo dianav e wrizioù ha ne c'hell genel neuze nemet frouezh trenk evel re un amrin bet savet gant an diaoul.

Olavo de Carvalho

Lakaet e brezhoneg gant **Ewan Delanoy**, embannet evit ar wech kentañ e *Diário do Comércio*, dindan an titl *Profecias do diabo*, niverenn ar 22 a viz gwengolo 2013.

Ikonenn

"Daskorit enta da Gaezar ar pezh a zo da Gaezar ha da Zoue ar pezh a zo da Zoue." (Mzh 12/17)

Bez' ez eo evel pa lavarfe Jezuz d'ar farizianed : "Kit 'ta d'ober ho trafikerezh bihan gant ar gouzalc'her roman, met pouezusoc'h eo skeudenn an Dizave war hon ene !" Rak e levr ar C'heneliezh, eo skrivet ez eo an den skeudenn an Aotrou Doue. Evit ar Yuzevion dezho ar Bibl da sevenadur damvenegiñ Levr an Derou a zo luc'hek ; an den an hini eo a zoug warnañ Anv ha Lesanvioù an Uheldreist. Hag amañ, ar C'hrist a fell dezhañ komz eus an den. Neket eus an den dre vras, neket eus an denelezh difetis, hogen eus den ar C'hrouer, eleze kement denienn krouet unan hag unan en askre e vamm.

Ar pezh a zo a-bouez eo daskor da Zoue ar pezh a zo da Zoue. Hogen mab-den a zo bet askoret²³ diwar Doue. Nann krouet a steudad, hogen en un doare unel evel ma-z eo Doue unel e-unan. Pep boud denel a zo ur skeudenn n'eus nemeti eus ar Vadelezh, ar Gened, ar Wirionez douevel. Ma tleer reiñ(-)en-dro d'an Impalaer roman penn ar roue-se, seul gent a se pep hinienn denel siellet a-grenn en he boud evel ma-z eo Doue, a dle en em reiñ a-bezh d'an hini a zo he C'hrouer hag he Salver. E pennad IX Izaia, e lennomp : *"An den a lavaro : Tra Doue, an Aotrou, ez on hag e skrivo war e zorn : "Da Zoue ez on"*.

Taolomp pled e c'houlenn Jezuz gwelout ar skeudenn a zo war ar pezh moneiz : da lavarout eo gwelout penn an hini a zo rekis adreiñ dezhañ an arc'hant-se. Hogen daoust ha n'eo ket mab-den ivez ur skeudenn ? "Neuze, eme Jezuz, daskorit !" Sellout a ra enta ouzh ar gweneg evit distagañ ur gaer a gentel katekiz war galvidigezh an den kizellet evit an Aotrou ha nann rikamanet evit un dra all, evit unan all bennak.

Bez' ez on enta un ikonenn douevel da gaeraat dalc'hmat. Pebezh raklun ! Zoken ar c'hentañ impalaer roman kanttroet, er IV-re kantved en doa meizet kement-se ; difenn a reas merkañ ar sklaved war o dremm, rak skeudennoù Doue e oant.

Tra a bouez eo enta doujañ d'ar skeudenn douevel a zo ennon. Ha setu amañ ar pezh a lavare en un doare kaer-dreist Tadoù an Iliz' :

²³ Askoret diwar : *issu de*.

"Doue e-unan a zo deuet war glask eus e skeudenn mazaouet²⁴ gant ar pec'hed, evel ma-z eo danevellet e hañvaladennn an drakm kollet. Evel pa lavarfed : "Daskoriñ da Zoue a zo daskoriñ e dra da Zoue" ; ar pezh a zo ur galv d'ar gantroidigezh. Rak mar ne zameuc'homp ket alies ar gened douevel. *"Den ebet, a gelenn Tadoù-an-Iliz, mar d-eo anat dezhañ bezañ heñveloc'h ouzh an diaoul eget ouzh Doue ne dle kemer ranngalon mar ne gav ket ennañ an enebañs gant Doue, rak ar Salver n'eo ket deuet evit an dud reizh."*

Ya, Doue e-unan, en e Vab dezhañ - setu an Emzenadur - a zo deuet war glask eus e skeudenn dezhañ e-unan sanket er fank. Fellout a ra d'ar C'hrouer arvestiñ, e pep krouadur, e skeudenn a vadelezh, a vraventez, a wirionez douevel ; ar pec'hed avat en deus en em silet e-barzh e Grouadelezh hollgaer douevel. Gant an den e oa stumm Doue met distummet eo bet an den-se. Ar melezour en deus dilufret, en deus joget, a zo aet da fall, en deus koc'hennet, en deus en em gailharet, a zo brevet e mil damm.

Ar c'hentañ gourc'hemenn : "Karout a ri an Arloz²⁵ da Zoue gant da holl galon, da holl ene ha da holl c'halloud", darvennus²⁶-tre eo. Goude bezañ klevet seurt gourc'hemenn e c'heller diogeliñ e c'hortoz an Aotrou pep tra digant e grouadur. Mar en deus gellet Kaezar moulañ e benn a zo dav daskoriñ dezhañ, kentoc'h meiz²⁷ e tle an hinienn louc'het gant skeudenn Doue dougen bri da wirioù Doue hag en em reiñ dezhañ en he fezh. Diouzh hennad speredel eo gwirioù Doue. Kensellout a reont an ene a zoug ennañ louc'hadur Doue hag en abeg da se e tle an ene-se bezañ penn-da-benn dezhañ ; Truaj hon Tad eo an ene a-bezh-kaer. Sant Aogustin a brezeg : Doue a glask e skeudenn en da ene. Petra a c'houlenn Kaezar diganit ? E skeudenn. Petra a c'houlenn an Arloz diganit ? E skeudenn. Ya, patrom Kaezar a zo war ar gweneg ; patrom Doue avat a zo ennout.

Evel ma-z eo tuet an den davet e Dad, evel ma-z eo pep tra en den graet evit klod an Aotrou, evel ma-z eo ar garitez lusker ar gevredigezh trinel, ar pezh a zo da rentañ da Zoue ez eo ar garantez

²⁴ Mazaouet : *gwastet, disleberet*

²⁵ Arloz : *Seigneur*.

²⁶ Darvennus : *exigeant*.

²⁷ Kentoc'h meiz : *à plus forte raison*.

a ro dimp. En diwezh, anv 'zo da anaout e Jezuz an hini a zeu eus Doue hag a zo da Zoue.

Bremañ, petore araezioù²⁸ a zo deomp evit lakaat ar patrom-se da lintrañ. En hon emvodoù lidadurel eo e stumm hor Salver e skeudenn dre al Lavar embannet, dre Dour ar Vadeziant, dre an Olevadurioù, dreist-holl dre ar Gevradiezh²⁹ graet ervat outi. En ur lidañ an Oferenn bleinet gant ar C'hrist hag a zo ikonenn an Tad e tistroomp da Zoue ar pezh a zo da Zoue (Kol 1/12), ec'h addeuomp davetañ hag Eñv a ro dimp, en eskemm muioc'h eget ur pezh moneiz, e Gorf hag e Wad. Ouzhpenn-se, kement oberenn a gendruer hag a vreudeuriezh a zivergl hon ene, patrom ar C'hrouer...

²⁸ Araezioù : *moyens*.

²⁹ Kevradiezh : *eucharistie*.

A-benn an diwezh, ar pezh a zo piaou ar C'hrouer ez eo an den. Alese ar vriegezh³⁰ denel. Ac'halese, dellezegezh ne vern kement den 'zo. Nikun na netra ne c'hell lemel digantañ an hennelezh³¹ sakr-se. Pep unan eus hor breudeur a zo teñzor Doue. Hag e aotrouniezh en em zispleg war hor buhez keodedel ha politikel. E berr gomzoù, galloud ar Stad ned a ket pelloc'h eget talvoudoù nuñv³² ha disgwail ar feiz.

Bez' ez eus bet, er Sav-Heol, terrorion-ikonennoù, trec'het int bet. En hon amzer-ni, ez eus c'hoazh gwashoc'h ikonoklasted, re "stuzegezh ar marv".

Youenn Troal

³⁰ Briegezh : *dignité, respect dû*.

³¹ Hennelezh : *identité*.

³² Nuñv : *sacré, saint, nevet*.

Notennoù diwar an darvoudoù gant Yann Maneguen

D'an 11 a viz Gwengolo e oa bet degemeret ur mennad a-du gant **dizalc'hiezh Katalonia** gant Parlamant **Breizh Veur** daoust m'en doa mouezhiet a-enep strollad ar penn-maodiern David Cameron. D'an 12, Valdis Dombrovskis, penn-maodiern **Letonia**, a savas a-du d'e dro. D'ar 16, Algirdas Butkevicius, penn-maodiern **Lituania** a reas kement-all. Hennezh eo a zo o kadoriañ Unvaniezh Europa er mizioù-mañ. E-keit-se e voe mouezhiet gant parlamant Europa ur mennad a erbed ur wech ouzhpenn ma vo graet a-zevri war-dro glad yezhoù Europa (645 a-du, 26 a-enep, en o zouez 13 gall).

Rusia : d'ar 21/7/2013, war **Ria Novosti** : *"Ur c'halloudegezh meur ez eo deuet da vezañ Rusia a-drugarez m'he deus degemeret ar feiz kristen"* en deus diskleriet Vladimir Poutin en ur gemennadenn kaset da Uheldad Moskov Kurillos evit 1025vet deiz-ha-bloaz Rusia. *"Degemeridigezh ar feiz kristen he deus merket ur c'hemmdro diskoulmus en istor hor bro a zo deuet da vezañ parzh kevanek ouzh ar sevenadurezh kristen hag ur c'halloudegezh bras er bed"*. Pa soñjer er renerion europat a nac'h pennek kedanavezout gwrizenioù kristen hor c'hevandir – kounait diskleriadenn J. Chirac – e ra tomm d'hor c'halon diskleriadenn Vladimir Poutin. Bennozh Doue dezhañ !

Komzoù an Tad Maner (1606-1683) e levr Châteaubriant *"Mémoires d'outre-tombe"* : *"An heol, a lavar an Tad Maner, n'en deus biskoazh sklerijennet ur c'hanton ma vije bet ennañ ur fealded d'ar gwir Feiz, ken kendalc'hus ha digemm, eget e Breizh. Trizek kantved a zo abaoe ma n'eo ket bet saotret gant an disterañ disfealded ar yezh he deus*

servijet da venveg evit prezeg Jezuz-Krist, ha n'eo ket ganet c'hoazh an den en defe gwelet ur brezhoneger a-vihanik o prezeg ur relijion all estreget ar relijion gatolik» (Mémoires d'Outre-tombe , Livre de Poche 1327, levrenn 1, p. 69). Setu petra e oa Breizh a-raok an Dispac'h ha donedigezh Sevenadur an Ankou !

222 500 bugel a zo bet lazhet e kof o mammoù e Frañs e 2011 en anv "frankiz ar merc'hed da ober pezh a garont gant o c'horf". Bez ez eo ar venevelouriezh³³, er c'heñver-se ur gealiadurezh par d'an naziouriezh pe d'ar gomunouriezh. Ouzhpenn ur milion a billulenoù-diforc'hañ a zo bet dasparzhet daoust ma ouzer e kemer ar bilulenn-hilastaliñ 91 % eus ar maouezed en oad da gaout bugale. 27 plac'h war mil etre 20 ha 24 bloaz a ziforc'h o babig bep bloaz. War bemp bloaz ez eo tost ur plac'h war c'hwec'h eta a ziforc'h en oadoù-se.

Daoust hag-eñ e ouzit e c'hell an hormonoù kevanaoz degas ur c'hrign-bev d'ar bronnoù ? E 1975 en em ziskoueze bep bloaz war-dro 7000 krig-bev nevez eus ar bronnoù e Frañs. E 2013 emamp gant tost da 60.000 degouezh. Pa vez sioc'hanaet ur babig ez eus riskloù uheloc'h a grign-bev evit ar bronnoù : se a oa anavezet gant ar stadegourion abaoe ur pennad mat. Bremañ ez eus skiantourion a lavar ez eo dre m'en em ziskouez kelligoù a zoug ar c'hrig-bev-se ent-naturel e bronnoù ar vamm, met ar c'helligoù-se a ya da get en un doare naturel ivez pa ro ar vamm he laezh da denañ. Pa chom trumm a-sav

³³ Benevelouriezh : *féminisme*.

argerzh an vrazedded avat e kustum ar c'helligoù-se paotaat muioc'h.

Gant ur vamm he deus sioc'hanet dija ez eus riskloù d'en em gavout gant babiged rak-ganet (a c'han a-raok an termen a nav miz), hervez ur studiadenn nevez deuet er-maez.

Eskob Roazhon an Aotrou d'Ornellas, e karg eus kudennoù ar bevzivez³⁴ a zo savet a-enep nevez lezenn ar C'hallaoued a aotre hiviziken bourreviadur ar c'hrouelloù-tud. *“Pa reer anv eus ar groueell ez eer-tre e don-donañ koustiañs Mab-den. Ha neuze pa gejer gant kerent o deus graet ur PMA (kaout ur bugel dre ar gimiezh ar vezekniezh) ez eo ar wirvoudenn hiliet-se o bugel hervezo. (...) A-benn ar fin ez eus ur seurt dismegañs ouzh an dud o deus c'hoazh un emskiant denel er gevredigezh”*. Barn a ra al lezenn dinatur : *“Fiziout a reont penn-da-benn en Ajañs ar vevvezekniezh, da lavarout eo en em zisamm ar bolitikerien eus o c'hiriegezh hag ez eo fiziet pep tra e kalvezourion. Kalvezourion eo a roio an aotre d'ober war-dro “Danvez un hiniden”³⁵ hervez geriaoueg Kuzul Aliañ Broadel war an Divez. (...) Kavout a ra din emamp dirak derou an Homo technicus a gemero lec'h an Homo sapiens”*.

Kuzul Aliañ Broadel war an Divez a zo bet skarzhet dioutañ an dud ar relijion gant ar prezidant Hollande. En o flas en deus lakaet tud a-du gant “Stuzegezh an Ankoù” : “euredoù” etre pared heñvel o rev, PMA, helazherezh, labourat da sul, c'hoari gant ar c'hrouelloù. N'eo ket echu gant follentez an droc'herion-bennoù pa ne c'hortoz an dud nemet un dra : surentez al labour.

Kouezhadenn un ikonenn eus al luskad “gay” : anavezet eo Matthew Shepard evit bezañ bet drouklazhet e miz Here 1998. E varv en deus sachet evezh ar bed a-bezh kerkent ez eus bet redet ar vrud e vije bet jahinet ha drouklazhet dre ma oa hepken un heñvelrevad. Ar vuntrerion o dije staget anezhañ ouzh ur gloued er gêriadenn anvet Laramie, er stad amerikan ar Wyoming. Keñveriet eo bet e varv gant kroazstagadur ar C'hrist. En un nebeut deizioù e teue ar Matthew yaouank da vezañ ikonenn al luskad “gay” er Stadoù Unanet, hag er bed a-bezh. Ur pennad-stur eus an New York Times d'ar c'houlz-se a leze da glevout e oa an derc'houezour en doa bet ezhomm a-viskoazh lobi ar gwirioù heñvelrevat. Yaouank e oa, kaer e oa, hag diantek ! Adalek an derou ez eus bet tud ‘zo evit arvreudañ an azrevell-se eus e istor. Ar buruteller Camille Paglia a skrive e-barzh *Salon* e oa techet Shepard da zaremprediñ keveladed³⁶ heñvelrevat e-touez livastred ar

³⁴ Bevzivez : Gourel. Divez pe buhezegezh ar pezh a zo bev Gg *bioéthique*.

³⁵ Danvez un hinidenn : Gg *Personne humaine potentielle* pe gwelloc'h marteze : Un hiniden war ober.

³⁶ Kevelad : *partenaire*.

c'harterioù tomm hag en dije gellet bezañ drouklazhet en abeg da-se. Poliserion karget eus an afer a soñje e oa liammet muioc'h e varv d'an drammet eget d'e heñvelrevezh. Un nebeut bloavezhioù war-lerc'h e varv ur restadenn eus ar chadenn skinwel *ABC 20/20* he deus studiet ar martezeadennoù-se, hogen ar c'helaouenner heñvelrevat brudet Steven Jimenez a zo aet pelloc'h gant ul levr nevez. Aet eo da Laramie evit komz gant testoù e sell da gevaotañ frammet'hoari ur film war buhez ha marv an den yaouank. Buan-tre en deus klevet eilstummoù eus istor Shepard na oant bet biskoazh danevellet a-raok hag a zistruje gwengel ar merzher “gay”. Seul uheloc'h ar savidigezh, seul serzhoc'h ar gouezhadenn !

Lezenn Daubira a zo bet mouezhiet gant holl gannaded an tu kleiz e Breizh, ha pergen an daou vrezhoneger tost d'an Emsav met a zo perzhiek hiviziken e argerzh diskar ensavadur ar Familh : Bleunven e Plabenneg ha Molac en anv an amvevadourion. A-hed an hañv n'eo ket koazhet an trouz a-enep al lezenn-se hag a-enep sevenadur an Ankou dre vras. E Karaez e vez beilhet bep Gwener da noz gant perzh izili 'zo eus EAT, da 20° 30 leurgêr Tour d'Auvergne.

E Melrann (56) e oa bet diskaret div zelwenn vras (1,20 m uhedder) eus ar c'halvar. Ranket o doa an disakrierien o disamantañ a ziwar kef ar c'halvar, ha goude-se gwintañ anezho daoust pegen pounner ez int. Abaoe un nebeut mizioù , kement tra a denn d'ar relijion gatolik a vez dismantret er barrez : kalvar, delwennoù, feunteunioù. E Bubri ivez e oa bet taolet d'an traon un delwenn eus ur c'halvar e miz eost ha dan eil a viz gwengolo e oa bet lakaet delwenn Sante Helena da gouezhañ e poull ar feunteun. E Plañvour d'ar 7 a viz Gwengolo eo lakaet e tammoù delwenn liesliv Gwerc'hez ar pedlec'h e kreiz-kêr, benet e maen gwenn ar ster Liger, eus ar Xvet kvd . Ar *gristengaserezh* a ya war washaat ouzh-ouzh-mui e Breizh.

Plouagad : 82,5 % eus an dud o deus mouezhiet evit ma vo graet labourioù bras war-dro an iliz-parrez a oa e mar da vezañ diskaret mar bije bet ar muiañ niver evit henn ober. Dija e oa c'hoarvezet ur vouezhiadeg a seurt se e komun Plounerin : eno, ar maer komunist a oa evit diskar an iliz met an dud o doa mouezhiet a-du gant adnevezadur an iliz-parrez, pezh a dalveze evito sammañ un amprest da resteurel a gant euro ar bloaz dre oaled, war dregont vloaz. Daoust m'o deus pellaet diouzh ar relijion e chom an tour-iliz un arouez a-bouez bras evit plouezidi ar parrezioù-se. Unan anezho a lavaras n'en doa ket kalon da ziskar ar pezh a oa bet savet gant e hendadoù a-hed ar c'hantvedoù.

Eskopti Gwened en deus nevez-sinet an emglev “Ya d'ar brezhoneg”. An eskopti nemetañ eo evit poent, a ziskouez e youl *“da zerc'hel kont*

eus sevenadur ha yezh Breizh evit avielañ” eme an Ao. 'n eskob Centène, “ha pergen dre ar skolioù”. E-keit-se, abaoe 2001 eo bet urzhiet meur a vrezhoneger da ziagon diaspad (unan e Kemper, unan e Sant Brieg) ha daou veleg (ar re-mañ evit eskopti Kemper ha Leon) hag ez eus meur a emsaver eus eskopti Kemper war o studi beleg e kloerdi etreeskoptiel Roazhon. Tra souezhus evit lod, e ped familhoù 'zo eus EAT hag izili eus Kristenion Breizh “Itron Varia ar Veleien” abaoe 2001 a-gevret gant “Mision Terezian”. Ma fell deoc'h dont da greskiñ ar bagadig a bed bemdez gant ar bedenn-se e c'hellit goulenn anezhi o skrivañ da Mision Terezian c/o EAT Kergreven 29800 Trelevenez.

Yannig Baron a zalc'h da stourm kalet evit ar brezhoneg er skolioù “katolik”. Skrivet en deus ul lizher digor d'an Eskob Centène evit lavarout dezhañ n'eo ket a-walc'h sinañ an emglev “Ya d'ar Brezhoneg” gant bezañs Lena Louarn bez-prezidantez ar Rannvro PSF e karg eus ar brezhoneg : gortoz a ra Yannig Baron araokadennoù gwirion evel ur politikerezh divyezhekaat er skolioù a zo e dalc'h an eskob. N'eo ket sur avat en defe an eskob kement-se a c'halloud e gwirionez siwazh. Klemm a ra ivez dre ma n'eus bet kavet den ebet a Vreizh evit sammañ ar c'hargoù uhelañ en Deskadurezh katolik e Breizh, pezh a zo drastus evit ar brezhoneg eveljust. “Torret eo lañs ar rouedad divyezhek katolik” emezañ.

D'an 28 a viz Mezheven en deus skrivet kadoriad “**Inaporc**”, an aozadur a vod holl berzhidi gennad ar c'hig-moc'h, **Guillaume Roue**, d'an holl vaered e Frañs evit klask enebañ ouzh ar c'hiz da lemel kuit muioc'h-mui ar c'hig-moc'h diouzh ar predoù-skol. Lavarout a ra dezho emañ evit al laikelezh, eveljust, met evelkent ez eo dav diwall ouzh liesseurtiezh ar meuzioù, hag ouzh... an armerzh. Guillaume Roué a zo ivez saver moc'h e Dirinon, kadoriad Prestor a zo ur C'hevredad saverien-voc'h a Vro-Leon dreist-holl. Kenlodeg eo ar c'hevredad war Lazhti-moc'h GAD e Lambaol-Wimilio e kichen Landivizio a zo war nes serriñ e stal, pezh a dalvez war-dro mil post labour distrujet e bro Landivizio, e-kreiz an tolead e Frañs e-lec'h e vez savet ar muiañ a voc'h... Evit ar wech kentañ a gredan eo diskouezet efedoù an islamadur war armerzh hor bro.

E kreizenn genwerzhel “Italia” e karter Blosne e **Roazhon** eo bet serret ar stal gigerezh ordinal nemetañ. En e blas emañ un eil stal gigerezh

halal. Abaoe pell e c'houzañve ar c'higer kunujennoù ha gourdrouzoù zoken. Dek gwech bennak eo bet torret e witrin dezhañ. Skrivet e oa bet “Ar moc'h d'ar marv, ho tiwadañ a raimp !” (*A mort les porcs, on vous saignera !*) . Bep tro en doa douget klemm, met ar polis ne gemer ket ar boan da ziblasañ zoken (diwar *Le Mensuel de Rennes*)

E Nikea eo bet aozet C'hoarioù ar *Francophonie* 2013. Paeet eo evel-just al lidoù koustus-se gant arc'hant an telloù a skrap deomp ar gouarnamant gall. 34 sportour afrikan, pedet brokus da zont da gevezañ o deus kavet gwelloc'h sachañ o skasoù ganto. Bez' e vint adkavet evel enbroidi dibaper a-benn nemeur moarvat, peogwir eo bet roet dezho ur viza evit ur miz hepken. Setu da betra e servij ar bitrak-se anvet *Francophonie*. Mar bez klask gant ar gouarnamant gall krennañ war an dispignoù noazus, setu un digarez mat da gorvoiñ...

Dlead Bro-C'hall a savo a-benn nemeur da 2000 miliard €, da lavarout eo pep bugel o c'henel en deus dija 30.000 € dleoù, ur prof pistriet evit kregiñ er vuhez. War lefigaro.fr ez eus un heñveler eus emdroadur eus an dlead-se. Skodeget e vezer o gwelout an euroioù-dle o kreskiñ gant tizh bras, evel kilometroù konter ho karr, met kalz buanoc'h.

Peshawar Pakistan : daou gamikaze islamour a zo en em darzhent gant o bombez e-kreiz un iliz e-pad an oferenn. Lazhet eo bet 81 den ha gloazet ur c'hant bennak. Kreñvoc'h-kreñvañ ez a ar sponterezh islamek a-enep ar Gristenion. Tennoc'h-tennañ e vo d'ar bolitikerion diogeliñ ez eo atav an Islam ur relijion a garantez, a zamantegezh hag a beoc'h.

Hervez sifroù maodierniezh an Diabarzh e konter 18 % eus ar boblañs e Frañs a zo o tont pe o tiskenn diouzh broioù Afrika. Ma saver d'an eil rummad e saver da 26 % eus ar boblañs. 40 % eus ar rummad-tud-se a zo en oad da labourat (60 % eo evit ar sitoianed c'hall). Paeañ a reont 15,6 miliard nemetken war 225 miliard a dailhoù dastumet e Frañs tra ma 'z eo heñvel dre vras an dispignoù dre zen pa vezer a orin eus Unvaniezh Europa pe eus ar broioù paour a Afrika.(cf. “*Les Français ruinés par l'immigration*” gant G. Pince, 15 euro)

Al lec'hienn “Breiz Atao” a zo bet kendaonet en abeg da “gunujennoù ha gouennelouriezh” war ur Senegaladez a orin deut da Vreizh e 1990 ha dimezet d'un ofiser. Dreist-holl e oa o vont

da vezañ dilennet da guzulierez departamant gant sikour ar PSF, e karter Rekourañs (68 % eus ar mouezhioù he doa rastellet). Dija e oa bet trouz un nebeut bloavezhioù 'zo a-zivout lec'hienn B.A. en doa taget kampionad ur genstrivadeg a sonerezh vreizhek bet gounezet gant ur paotr du e groc'hen.

War se eo bet diskleriet gant “**Kevre Breizh**” “*ez eo gant maouezed a seurt-se e savo Breizh un dazont a zoare dezhi hec'h-unan*”. Sur a-walc'h eo ret chom seven ha doujus ouzh kement den ha maouez a zo, met ne weler ket perak e kemerfe ar vaouez-se muioc'h a soursi evit Breizh dre ma vefe a orin estren, eget unan all ganet er vro. Dreist-holl eo mat en em c'houlenn perak en deus kredet K.B. ober seurt diskleriadur : an dezo o doa da dagañ broadelouriezh B.A. diazezet war “ar ouenn”, war a seblant. Moarvat ivez e klask rener Kevre

Breizh, diwar dagañ emsaverion, flourañ ar sosialisted c'hall, a-benn kenderc'hel da denañ bruzhunoù diganto evel ma ra abaoe 50 vloaz, tra ma teu Breizh pennasket da goll da vat he fivelezh, ha m'eo rediet he bugale da zivroañ en abeg d'ar “*melting pot*” hollvedelour c'hoantaet gant Pariz. Eno eo gwriennet moarvat fulor gouennelour B.A. hag e bennadoù binimus : emzalc'h difur tud a galon a wel dirak o daoulagad o bro gwerzhet gant ar re a zo sañset he difenn.

Kenderc'hel a ra Embannadurioù Preder gant embannadur Geriadur ar Vezekniezh Gi Etienne. Degas a reont da soñj : “Dalc'homp bezant en hon spered, evelkent, ne oufe ur geriadur savet en ezvezañs ur gevredigezh a yezherion bezañ estreget danvez ul lavar bev”. www.preder.net

Oberiantizoù Emglev an Tiegezhioù

Emvod-meur EAT a zo bet dalc'het d'ar 14 a viz Gouhere dindan un heol hinon e Trelevenez da heul oferenn vrezhonek Gouelioù Kann Al loar e Sant-Houarzhon Landerne. Kempouez eo ar c'hontoù a-drugarez d'ar profoù. Gwerzhet fall eo bet romant Youenn Olier “*Poanioù-spered an Tad Gwazdoue*” ha chom a ra 100 skouerenn bennak eus e romant “*Enez ar Vertuz*” hag eus “*Stumm dreistordinal an Oferenn ha pedennoù*”. Daoust da se ez eus anv da voulañ katekiz Sant Pius X evit ar vugale o vezañ ma ne gaver mui netra evito abaoe hini Tolra eus ... 1943.

Lec'hienn EAT a zo anavezet mat bremañ : war-dro ugent lugadenn a vez bemdez da vihanañ. Bodad “Ar Bibl Santel” en deus embannet war ar genroued levr tev ar Profed Jeremia, ar C'hrennlavarioù, ar C'hlemmgenoù

Ester ha Judit a zo bet lakaet ivez. Yezekiel a zo bepred war ar stern : un hir a labour eo. Liderezh an eurioù a ya en e roud : degouezhet eo er bajenn 468 eus an trede Levrenn (war beder) ha bemdez e kinnig Paul Kalvez dimp evel boas ul lavarenn bennak da brederiañ warni : Bennozh Doue dezhañ ha d'an holl genlabourerion.

Emgav EAT a vo e Bro Naoned : d'ar sadorn 26 a viz Here e Pornizh : E ostaleri Feunteun ar Vretoned Pornizh eo bet lakaet emgav EAT e-pad ehanoù an Hollsent adalek 15 eur. Un digarez e vo evit izili ar c'horn d'ober anaoudegezh kenetrezo ha da skoulmañ darempredoù a vignoniezh. Displeget e vo pergen doare hol labourioù war-dro al liderezh, ar Bibl, ha framm Kristenion Breizh.

Mererezh :

15 € eo ar skodenn emezelañ da EAT a ro ar gwir daresev *Kannadig Imbourc'h* (18 € er-maez ar C'hwec'hkogn). Talet e vez e penn-kentañ ar bloaz (pemp kasadenn da vihanañ). Ar chekenn a zo da gas war anv **EAT** pe **Imbourc'h** da : E.A.T., c/o Yann MIKAEL 12 straed René Giraud 44130 BLAEN - Roll an niverennoù pe oberennoù n'int ket c'hoazh diviet a c'heller kaout o skrivañ pe war : <http://emglev.wordpress.com>

Skridaozerezh :

Ar pennadoù a zo da gas da : jean-mariemichel@neuf.fr , pe dre ar Post da rener Kannadig Imbourc'h : Yann MIKAEL, 12, Straed René Giraud, 44130 BLAEN. Ar pennadoù ne engouestlont nemet ar re o deus skrivet anezho. Moullet ez-prevez gant an embanner : **Emglev an Tiegezhioù** Kergreven 29800 Trelevenez. ISSN : 1144 357X